

JEZUZ HA BREIZ!

KANTIK

BUGALE BREIZ-IZEL


DA

ZAND ERVOAN


Allegretto



A- zo ar Gen-kiz a le-re d'he mab Er-voan Ker-



var- zin : Ma- big, e- mei, noz ha beu-re, C'houi



be- do war ho taou- lin. La- ret zo d'in a- beurz



Dou-e, Pe oac'h bi-an, ma bu-gel Da vab Er-voan



a vo eunn de Eur zant braz enn Breiz I- zel.

DISKAN

*Otro zand Ervoan binniget,
Ma zand Ervoan Breiz-Izel,
ENN han Doue ma zikouret,
Ha me vo bete mervel,
Me vo eur zand, eur zand ive,
Evel ma oac'h enn bugel,
Hag eunn devez em o enn Ee,
Ma lod gand zent Breiz-Izel.*

Ervoan a c'hoerze he lagad,
O klevet he vamm Azo,
Ha daoulinet tal he vamm vad,
A' lere he bedenno.
« Mar am c'heret, o ma Doue,
» E levere ar bugel,
» A vo Ervoan eur zant neve
» D'he vroik keaz Breiz-Izel. »

Aked vraz hen ee bemde
Da lenn bue zend ar vro,
Ha goude pedi a gleske
Ober evel-t-he d'he dro.
« Reit d'in, ma Doue, emean,
» Adalek ma hon bugel,
» Roet d'in ar c'hras da vean
» Eur zant vel zent Breiz-Izel. »

Ne gere netra barz ar vro
Vel he iliz Landreger :
ENN ofern hag er gouspero,
Ervoan a gane zeder.
« Eunn de a vo, ebars ann Ee,
» E levere ar bugel,
» Hag e kanin gand ann Ele
» Ha gant ma zent Breiz-Izel. »

Gwelan a re o kimiadi
D'he vamm Azo ar Genkiz,
Gwelan 're d'he dad Helori
'N eur vond da skolio Paris.
« Da Baris ma renkan monet,
» E levele ar bugel,
» Enn Paris, me vo fur bepred,
» Vel em broik Breiz-Izel. »

Ne oa mesk ar iaouankiz,
O ! nan, ne oa ket unan,
O studian enn ker Pariz,
Furoc'h vit ma oa Ervoan.
ENN Paris kerkoulz hag er vro,
N'ankoueaz ket ar bugel
Pez a lere he vamm Azo,
Pe oa 'nn he vro Breiz-Izel.

ENN Breiz-Izel, o ma Doue,
A zo kalz a vammo
Hag a lavar d'ho bugale,
Evel ma lere Azo.
Ha pe 'ne gret he bask kentan,
E leront hi d'ho bugel :
« Deut, bugale, deut da bardonan
» Da zand Ervoan Breiz-Izel. »

« Nn'onn pera refet 'nn ho pue,
» Nn'onn pelec'h veet kaset :
» Gand ober bolante Doue,
» C'houi vo evurus bepred. »
Evel se lavar ar vamm vad,
O tonet gant he bugel,
O tonet da westan he mab
Da zand Ervoan Breiz-Izel.

Enn kichen he vamm daoulinet,
ENN chapelig zand Ervoan,
Ar bugel kez hen euz laret
Vel Ervoan, pe oa bian.

« Otro zand Ervoan, emean,
» Me nn'on nemet eur bugel :
» Evel d'hoc'h me garje bean
» Eur zant d'enn bro Breiz-Izel.

» Gant ma vo bolante Doue,
» N'euz fors pelec'h vin kaset ;
» N'euz fors pera vin em bue,
» Me a vezo fur bepred.
» Zand Ervoan, c'houi am zikouro,
» Adaleg ma on bugel,
» Hag eunn devez 'm o enn Envo
» Ma lod gant zent Breiz-Izel. »

Ma Jezuz, mizerikord !
Kalon douz a Vari, beet ma zilvidigez !
Sant Josef, pedet evid-omp !

Imprimatur :

A. CHATTON, *vikel vraz.*

Sant-Brieg, 14 a viz mae 1883.